

- 11 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

89. ME MEUS CHOAZET EUR VESTREZICK ...

( follennoù 2 - 3 )

Me meus choazet eur vestrezik deus a tostik d'am zi  
 a ne meus ken plijadur nemed pa vezan e parlant gati  
 e parlant en e frezans va oll kontentament  
 Joafus e pepred va c'halon pa e c'hlevan e parlant.

Kenta ma vellis va dous e voa var al len o saoni  
 A me lakad va zog em zorn evid monet de saludi.

- Salud deoc'h, ma mestrez, ma meritan an henor  
 ar c'hras ag ar pouvoar, an alc'houez deus o tensor.

Kalz a deud° zo droug kontant ma deuan do dirempredi(1)  
 Kalz a dud ambitius karget a ambition  
 Pa no deveus ked ma mestres ar meneus suposition.

- El leel, va servicher ne zeziri° nemet oc'h da veza  
 va denzorrier (2)  
 Va lignez nit° ket kontant em be eur c'hontr-portier(3)

- Ma ne ket kontant o lignez e pe eur c'hontr-portier  
 Me zo mab deur jardriner a voar ober fleur en peb amzer  
 A voar ober tin a levand a zere deus an dud iaouank.

Me a meus pem kant skoet a preno desoc'h mezer,  
 eur stall a kondition er gerik Landreger.

- Neket va c'halite beza drapierez-mezer  
 pa ne ouzon ar gallek na skriva var ar paper

- Me kemero eur c'hloarek ag a quezo ar gallek  
 Ag a chomo ganeme va douç ken a po desket.

C'houi a chomo en o stall, ne rect nemed kommandi  
 A touch ar beamant en desir o faltazi.

Chomet e va mestrez klan, affliget gant (ar) klenvet  
 Petra meus-me da ober evid mond de goelet.

- Salud deoc'h, va mestrez, setu me deud do goëlet  
 Kleved e moa lavaret e voac'h chomet gant ar klenvet.

- 12 -

- El leel, va servicher, gwir avoalc'h e leveret  
Serten on chomet klan, afflijet gant ar glenvet.

Ma piche ar vadelez da rei eun aval beng<sup>o</sup> din °lenn :benag  
Marteze gant en ez a deuje da velad din.

Pelec'h e man va mam, larit dei dond dam c'haouet  
Ma rin va testamant breman pa oc'h deud d'em goëlet.

Dallid va alc'hoëchou, a nombr eus va habijou ..  
- Me ne meus ket affer a nombr eus ho habijou.

Nemet unan benag dimeus o mouchouerou  
evid sec'hi va daelou, va mestrez, pa viod maro.

~~~~~  
VVVVVVVVVV

Jannet Puill, 9 Fevr. 1851

~~~~~  
VVVVVVVVVVVVVVVV

- (1) deud<sup>o</sup>, kompreñ: dud
- (2) zeziri<sup>o</sup>, kompreñ : zezirin
- (3) nit<sup>o</sup>, kompreñ : nint